



# mbourc'h

N i v e r e n n 7

30 a viz Mezheven 1970

IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

Niverenn 7

30 Mezheven 1970

TAOLENN

Raksell war dazont E.B.V. hag ar  
Frammer mizvezhioù a zeu .....p.159

Stad, kevredigezh ha sevenadur  
(trede pennad : endalc'hadoù an adempradur)..... - 162

Un nebeut titouroù diwar-benn  
armerzh Breizh.....p.172

Devezhioù-studi an hañv.....p.172

---

Daoust maz eo savet an darn-vuiañ eus pennadoù ar gelaouenn-mañ  
gant izili eus EMSAV AR BOBL VREZHON ez eo embannet skridoù IMBOURC'H  
dindan atebegzh an aozerion.

---

Koumanant-bloaz: 20 lur. K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon.

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver. Priz an niverenn : 2,00 lur.

Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas : EMSAV AR BOBL VREZHON

(IMBOURC'H) 30 pl. des Lices, Roazhon.

N°CPPP : 50 015

RAKSELL WAR DAZONT E. B. V. HAG AR  
FRAMM ER MIZVEZHIOU A ZE U

Unan eus amkanioù E.B.V. eo sevel a-gevret gant Brezhoned all ha na vint ket marteze, dre ret, izili anezhañ ur Framm broadel a vo diazez ur gevredigezh vroadel e Breizh. Evit ar poent ne c'hell ar Framm-se plediñ nemet gant ar c'helennerzh. Mat e vefe eta, e dibenn ar bloavezh-skol-mañ, resizañ e pelec'h emeur erru war an dachenn-mañ end-eeun.

Soñjet e oa bet da gantañ e vije tu d'ober eus ar Framm un aozadur digor d'an holl Vrezhoned ha pergen d'ar re a zo izili ar strolloù breizhat niverus, gant m'o dije degemeret pennaennoù E.B.V. e unan. War hañval avat n'eus ket da gantañ e teufe ar soñj-se da wir war verr dermen da vihanañ. Abegoù a bep seurt a c'hell diskleriañ an dic'halluster-mañ. Ret eo gouzout, da skouer, n'eo ket ar strolladoù politikel breizhat evit dere'hel kont eus E.B.V. a zo o paouez diwanañ ha n'en deus ket gellet dastum nerzh evit c'hoazh. Posupl eo ivez ne garfe ket ar strolladoù -se degemer pennaennoù E.B.V. evel m'int bet geriet gantañ e unan ; erfin, emellet ha maz int gant ul labour brudañ e galleg - 90% eus o stourmerion a zo gallegerion - n'o deus ket ar strolladoù-se amzer da blediñ gant ar yezh, moarvat. Diaes eo empennañ, a-hend-all, evit ar poent, e c'hellfe un englev bezañ skoulmet etre un aozadur evel E.B.V hag ar Framm, ha strolladoù o deus, ez pleustrek, ar galleg da yezh labour ha da yezh kefridiel. Spi hon eus, eveljust,

e kemmo an traoù hag e vo kresket da vat lec'h ar yezh er strolladoù politikel-se hogen er mare-mañ ez eo ret mat gwiriañ ne c'hell ket E.B.V. hag ar Framm kenlabourat ganto war dachenn ar c'helennerzh.

Ur gudenn disheñvel a sav e ser ar strolladoù sevenadurel breizhat. Daoust ma kaver er strolladoù-mañ, evel er strolladoù politikel, un niver bras a vroadelourion, daoust m'en deus hini pe hini anezho ar br-zhoneg da yezh kefridiel ha da yezh labour, e talc'h an izili anezho, meur a wech, d'ur savboent yezhelour a zo diforc'h a-grenn diouzh hini E.B.V. hag ar Framm. Rak n'eus ket anv ganeomp a zifenn ar yezh, ar vroad, ne lavaran ket. SKOL AN EMSAV n'eo ket graet evit deskiñ ar yezh hogen, da gentañ, evit ober eus he skolidi Brezhoned emskiantek, brogarourion prest da ouestlañ o buhez penn-da-benn da servij ar vro. SKOL AN EMSAV a zo eta ur skol vroadel a brient ar Vrezhoned da gemer perzh e buhez ar gevredigezh vrezhon ; ha kement skoliad a zeu da enskrivañ enni a rank gouzout an dra-se adal an deiz kentañ ma laka e dreid en ur greizenn. En abeg da se, ha betek gortoz eta, ne c'hell ket E.B.V. hag ar Framm kenoberiañ gant nep strollad sevenadurel a chomfe war bazenn amsteriek ar sevenadur, daoust m'hon eus spi, en dro-mañ, e kemero ar strolladoù-se un emzalc'h sklaeroc'h e-keñver ar stourm broadel en amzer-da-zont.

Kement-se a zo lavarout en diwezh e rank ar Framm chom dishual ken n'o devo ar strolladoù breizhat degemeret en un doare splann pennaennoù E.B.V. diwar-benn ar stourm a zo da ren

e Breizh ; hag, a-se, ne c'hell labourat ennañ er c'houlz-mañ nemet izili eus E.B.V. pe stourmerion dieub a zegemer pennaennoù E.B.V. hep rakwelout evit keloù-se kemer perzh el labour politikel war-eeun en amzer-da-zont.

Evit ar peurrest, kounomp ez eo ar gevreadelezh reolenn diazez E.B.V. hag ar Framm evit ar poent - ha se zo natur e deroù pep aozadur. An hevelep patromoù kenurzhañ a vez lakaet da dalvezout e pep kreizenn ; implijet e vez enno ar memes lizheradur (e-keñver istor Breizh hag an Emsav, da skouer), er c'hentelioù koulz hag en Devezhioù-studi hogen al lakaat da dalvezout a chom e dalc'h pep kreizenn hec'h unan.

E.B.V hag ar Framm ne c'hellont kontañ nemet warno o unan ; da bep kreizenn eta stummañ emsaverion nevez er bloaz-skol nevez a zigoro e miz Gwengolo ha broudañ anezho da grouiñ kreizennoù all tro-dro dezho. 1969-1970 a zo bet bloavezh an diwanañ ; 1970-1971 a zle bezañ bloavezh ar c'hreskiñ hag an dishiliañ : hemañ a zo hent ar berzh hag an trec'h.

=====

ROPARZ HIEMON a gomz ebarzh UR BREIZHAD OC'H ADKAVOUT BREIZH.

Ar brezhoneg, evidomp, eo ar frankiz ; ar galleg ar sklaverezh. Petra ' ra dimp bezañ gouiziek ma ne c'hellomp ket bezañ dishual ? Bez ez eo Breizh ur vroadelezh ! Neuze ne c'hell ket kaout div yezh. Pobl ebet n'he deus div yezh. Pobl ebet n'he devo biken. Etre ar brezhoneg hag ar galleg ez eo ret dibab /.../

Evidomp-ni, ra vo gwasket ha sanket en hor penn ar wirionez-mañ : lazomp ar galleg, pe ar galleg hol lazho. Pep unan ac'hanomp a fell dezhañ harpañ ar brezhoneg. Ra falvezo da bep unan ac'hanomp dizeskiñ ar galleg, stourm outañ e pep lec'h hag e pep amzer, stourm evit ur Vreizh vreizhat penn-kil-ha-troad ha n'eo ket hanter c'hall. Pet ac'hanomp a gredo ober ar c'hammed nevez-se, ha lakaat ar re all d'ober ?

Mezheven 1925

+++++

S T A D, K E V R E D I G E Z H H A S E V E N A D U R

(t r e d e p e n n a d : e n d a l c ' h a d o ù a n  
a d e m p r a d u r)

=====

Damveneg hon eus graet eus an 'diempradur' er pennad diwezhañ hon eus savet e ser "stad, kevredigezh ha sevenadur". Mat e vefe bremañ endonañ endalc'hadoù ar germañ a zo bet krouet nevez zo gant stourmerion zo evit pourchas un damkaniezh kentañ d'an emsaverion en emgann o deus da gas da benn e Breizh.

An tamall kentañ a c'hellfed ober da seurt ger eo bezañ kevrennek ha nac'hus (petra e vefe an empradur ?) hag ivez ober dave d'un tremened ha n'en deus ket kalz darempred gant an amzer a zo o ren hiziv. A-dreuz dezhañ evelato e c'heller merzout mennadoù politikel ar stourmerion o deus krouet anezhañ end-eeun hag a garfe kreizennañ er Stad pep buhez politikel, gant ar youl, moarvat, da ziogeliñ unded yezhel ha speredel ar vroad.

Ne c'heller ket nemeur nagenniñ e ser roll ar Stad hag ar galloud evit treuzfurmañ ur boblañs en he fezh diouzh patromoù ar gevredigezh he deus kempennet ar Stad-se. Ne c'heller ket nac'hañ, da skouer, - ha se hon eus merket endev - ez eo bet tregemmet stuz kravezel ar boblañs e broadoù zo a Europa etre ar XVvet hag an XVIIIvet kantved da heul savidigezh stadoù protestant, evel maz eo bet tregemmet ivez e Rusia stuz speredel ar boblañs gant ar Stad komunour a zo bet

diazezet e 1917. Kement-se a zo sklaer a-walc'h. Diskouezet hon eus hepken, diouzh un tu, ne oa gallus implijout ar Stad nemet pa c'helle ar renerion anezhi en em skorañ war ur gevredigezh diorreet a-walc'h (pezh n'hon eus ket c'hoazh e Breizh) ha d'an eil e oa tonket d'ar Stad en dije ensammet a-grenn ar gevredigezh betek lemel pep emrended diganti gwallegañ ha lezel da vreinañ an uhelvennad a vije bet awen ar gevredigezh -se (an dra-se a zo c'hoarvezet e stadoù protestant Skandinavia, da skouer, koulz hag e Rusia er c'hantved-mañ).

§§§

E devoud n'eus bet klasket ober un diforc'h etre ar gevredigezh hag ar Stad nemet er grennamzer (pa zigemmed ar galloud'hoalel' diouzh ar galloud speredel) hag en amzervezh vodern (paz eo bet krouet ar gouarnerezhioù a voe anvet "gwerinveliek".) En degouezh-mañ, pergen, ez eus bet aotreet da veur a gevredigezh kedvevañ e diabarzh an hevelep broad. E Bro-C'hall, da skouer, e c'heller diforc'hañ ur gevredigezh katolik hag ur gevredigezh komunour h.a. ; e Bro-Saoz e vev kichen ha kichen ur gevredigezh sokialour hag unan virour, unan katolik hag unan protestant, h.a. rak bevennoù ar c'hevredigezhioù a zo heloc'h hag en em groaziañ a reont an eil eben. Moarvat, er broadoù-se ez a an tu-kreñv bepred gant unan eus ar c'hevredigezhioù-se. E broioù ar c'hornog, lakaomp, ez eo miret dalc'h ar veli gant ur gevredigezh strizh a-walc'h a zo hini mistri ar c'hevala hag an arc'hanterezh, en em gemmesk

mui pe vuigant hini uhelgargidi ar Stad end-eeun hogen ne glask ket houmañ mougañ penn-da-benn ha war-eeun ar c'hevredigezhioù all a zo suj dezhi ; ar re-mañ a-hend-all a gevez etrezo hag ar gevredigezh trec'h a ya a-wechoù da dredeog etrezo.

Un tamm galloud hag un tamm dishualded o deus eta ar c'hevredigezhioù-se. Ha petra eo natur ar galloud hag an dishualded-se ? Hama ! Armerzhel rik ez eo : nag ar Strollad komunour e Bro-C'hall, nag an Iliz ne c'helljent kas da benn o obererezh ha seveniñ o c'hefridi ma n'o dije en o c'herz. Ur c'hevala bennak (hag eveljust, adarre, e kemeran ar ger -se en e ster armerzhel rik). Kemendall a c'heller lavarout diwar-benn an ilizoù pe rangredennoù pe strolladoù pe vodadoù stank a ya d'ober ar vroad amerikan. Dre vras eta e c'heller lavarout ez a ar frankizouriezh armerzhel a-unan gant ar frankizouriezh speredel.

Diaes eo eveljust da zispac'herion degemer seurt reizhiad a lez ar galloud etre daouarn ur gevredigezh strizh a stumm dre vras ar sevenadur hervez hec'h ezhommoù hag he mennadoù. Aotreet eo moarvat d'ar c'hevredigezhioù all krakvevañ hogen n'o deus spi ebet da dreuzfurmañ ar boblañs en he fezh war o zro. Kement emsav a fell dezhañ bezañ hollvan - da lavarout eo tizhout ar boblañs en he fezh - a denn eta da vezañ hollveliek e keñverioù zo.

§§§§§§§§



Se a c'heller kompren aes rak dañjerus eo zoken ar c'hevezerezh hon eus meneget evit ar c'hevredigezhioù maezek : war var emaint da vezañ levezonet, kontammet hag esmolet gant ar c'hevredigezhioù muiek. Ur skouer a gement-se hon eus moarvat en Izelvroioù e-lec'h ez eo techet ar gevredigezh katolik da zegemer, hep gouzout dezhi zoken, savboentoù ha merkoù-barn ar gevredigezh protestant a zo an tu-kreñv ganti er vroad, e-keñver armerzh pergen. Kemendall a c'hoarvez e Bro-C'hall, lakaomp, en darempredoù a stag etrezo ar c'hweluniadoù CGT ha CFDT, an eil o tont tamm ha tamm da zegemer savlec'hiadurioù egile a zo trec'h dezhañ.

§§§§§

Ar c'hoarvezad diwezhañ-mañ, a-hend-all, a ziskouezfe a-walc'h e tenn pep broad - pe rann-vroad - war-du un unded bennak, dre ma tegemer ar c'hevredigezhioù enni ar pep brasañ eus talvoudoù ar gevredigezh trec'h en ur zilezel o re-int ; tonkadur ar re-se eo neuze treiñ da strolloù korrniverel a-grenn ha da zilezel pep gred (setu dres planedenn ar brotestanted e Bro-C'hall).

§§§§§

Anat eo ivez e c'hellfe an Emsav dreistpadout da viken evel strollig a seurt gant hini ar Vormoned er Stadoù-unanet, da skouer, dastum a-walc'h a c'halloud armerzhel da zreistvevañ ha zoken kreskiñ un tamm mat hep reiñ brall na preder zoken d'ar Stad ha d'ar gevredigezh c'hall en hor bro.

D'ar c'houlz-se ivez e kollfe an Emsav e ster. Rak-se ez eus bet lakaet dezhañ ivez ur pal dispac'hel a zo sevel ar Stad a zeuy da vezañ ar benveg ensammañ ar boblañs er gevredigezh vrezhon.

Betek hiziv e oa sellet ar pal-se - aozañ ur c'hempouez nevez a-du gant ur gevredigezh vrezhon trec'h a-drugarez d'ar Stad a vije en he servij - evel bastus a-walc'h ; kredet e veze e tiwanfe unded vroadel ar vroad diwar ar politikerezh unyezhañ mennet da grouiñ ur vuhez veizel unvan e Breizh; eus ar-gredonn-se e teuc ar pouez a roed d'ar skritur peurunvan war-lerc'h an eil brezel bed rak hep ar skritur-se ne c'helle bezañ nep politikerezh unyezhañ ebet.

§§§§§§§

Abaoe un nebeut bloavezhioù avat ez eo douget un darn eus an emsaverion da veizañ ar stourm evit ar Stad evel ur stourm kevredigezhel koulz hag evel ur stourm broadel. Evit abegoù liesseurt a-hend-all : lod en anv ar stourm etre renkadoù lec'hiet war ur par etrevroadel, reoù all en anv an efedusted politikel. Bezet pe vezet, an holl a zo a-unan evit disteurel ar stad frankizour a rofe lec'h d'ur c'hevezerezh a drofe marteze a-du gant ar c'hendereoù gallgar ha galleger o ren an armerzh er vro-mañ. Hemañ, da vihanañ, a zo an digarez roet gant ar veligarourion a

wel en unstrollad renkadel pe vroadel ar pare nemetañ da  
walennoù Breizh. N'eus ket pellzo e tiogele unan eus an  
aoadurioù beligar-se e ranke an Emsav e unan bezañ unvanet  
evel ma oa bet unvanet ar skritur, lakaomp, e 1941. Seurt  
mennad, war hor meno, a zle bezañ ensellet a-zevri rak diskouez  
a ra ez eo mennet darn e Breizh da ziazezañ ur gouarnerezh  
hollveliek e stumm pe stumm - ur rakwel eta ha na c'hell  
ket bezañ degemeret diwar skañv.

§§§§§§§§

Lavarout a raimp da gentañ ne endalc'h ket unvanadur  
ar skritur hag hini ar politikerezh e Breizh an hevelep  
disoc'hoù. Ster ar yezh peurunvanet a oa hepken kadarnaat  
unyezhadur da-zont ar vro a zlee diboufañ war hec'h unvanadur  
speredel ; hogen doare an unvanadur diwezhañ-mañ ne oa ket  
termenet en a-raok ; an holl eta a c'helle bezañ a-du gant peurun-  
vanidigezh ar skritur. Goulenn digant ar Vrezhonek kemer  
ar brezhoneg da yezh vroadel a zo un dra ; goulenn diganto,  
a-benn ar fin, degemer ur reizhiad politikel awenet gant  
ur gelennadurezh ha na'glot ket gant kendrec'hadurioù donañ  
ar pep brasañ anezho a zo un dra all. An holl, da skouer,  
n'int ket evit degemer ur gelennadurezh hag a ra eus ar Stad  
un doare Peurvoud hag eus ar renerion - pe ar re en ginnig  
da zanvez renerion anezhi - ur seurt doueed e rankfe an holl  
plegañ o glin dirazo.

§§§§§§§§

Seul zañjerusoc'h eo mennad ar veligarourion er vro-mañ maz eo ar stourmerion vrezhon, evel an darn-vuiañ eus ar stourmerion bolitikel (ha se ne hañvalo bezañ souezhus nemet d'un arvester diwar-c'horre), diseblant ouzh ar mennoziou politikel, gant m'o devo spi da gaout perzh er galloud : ar galloud eo a glaskont, da gentañ, pe, da vihanañ, un tamm galloud, goude ma ve a eil-dorn ; alies, a-hend-all, n'o deus gwelidigezh sklaer ebet eus ar pal a zo da dizhout.

Houmañ a zo e gwirionez unan eus saveleñnoù ar gevredoniezh politikel ha skouerioù anat eus ar c'hoarvezad-mañ a c'hellimp menegiñ : un darn-vat eus izili ar Strollad komunour alaman a repuas e strollad Hitler war-lerc'h trec'h hemañ ; hag en eneb, meur a ezel eus ar Strollad kenelwerinat alaman a gavas bod ha fred er Strollad komunour en D.D.R. goude ar brezel. Anv a c'hellfemp ober ivez eus ar "stourmerion"-se a ya eus ar Strolladoù gall d'an Emsav, hag en Emsav eus ur gostezenn d'eben. An holl re-se, evel ma lavaremp, ne glaskont nemet tasmant ar galloud, pa ne fell ket dezho nemet diduamant hepmuiken. Kiriek eo d'ar skañv-bennegezh-se e Breizh koulz hag en Emsav e unan an diouer a wir stummadur politikel e-touez an danvez stourmerion o laka da zarbenn ar Stad kreñv hag ar Framm dir o disammo diouzh pep atebegzh politikel. Padal, ouzh ar re-se e c'heller goulenn : Breizh moarvat hogen evit petra ? Rak Breizh hag ar Stad vrezhon ned int paliou diouto o unan.

§§§§§§§§§§§§

Ar wir stourmerion bolitikel avat ne reont nepred eus ar Stad hag he berzh-mat un doare doue, evel ma ra, war a hañval stourmerion zo e Breizh ha n'o deus, e gwirionez, kendrec'hadur politikel gwirion ebet hag a zo prest da zarbenn n'eus forzh peseurt "kelennadurezh" evit heuliañ ar c'hiz, gant ar goanag e roy an trec'h dezho dre un taol bazhud. Kemer a rin skouer Lenin. Daoust ha Rusia a verne dezhañ pe Rusia komunour ? Daoust ha termet en deus da zifoarañ tachennoù ec'hon eus tiriegezh ar Stad rusian evit ober eus houmañ ur Stad soviedat ? Ur skouer all a gemerin bremañ, enebet krenn ouzh hounnezh : daoust ha dleet e oa d'an Alamaned o devoa ur meizadur eus Bro-Alamagn hag eus he galvedigezh disheñvel diouzh hini Hitler sentiñ penn-da-benn ouzh rener ar Stad alaman war zigarez en doa hemañ kresket en un doare marzhus galloud Alamagn, pourchaset dezhi blenierezh Europa pe war skeud ma leuriade, a-hervez, reizhveliegezh ar Stad alaman ? Rak-se n'o deus ket ar Vrezhoned da zegemer beli n'eus forzh peseurt galloud brezhon netra nemet dre ma vije deuet a-benn da adsevel ur Stad vrezhon - ma tizhfe ar pal-se o vougañ gwir ene ar vroad, o trañsañ he spered hag o lemel en diwezh pezh a zo abeg he bezoud.

§§§§§§§§§§

An dra-se, avat, eo a fell da strolloù brezhon zo ober pa embannont emaint e soñj kemer ar galloud e Breizh ha treuzfurmañ ar vro-mañ e seurt doare ma ne vo mui a-benn ar

fin darempred ebet etre Breizh a-ziagent hag an hini a vennont krouiñ, eus netra koulz lavaret (rak prest eo ar stolloù -se da ziogeliñ, eveljust, n'eus bet Breizh nag Emsav ebet) ken e vo kollet, ma ne ziwaller ket, an talvoudoù a zo bet diazez istor hor broad. Evit ar re-se eta ez eo Breizh ur c'hevala pe un danvez krai ha n'en deus bet biskoazh stumm ebet hag a c'hell bezañ benet ha kempennet diouzh froudenn ar re o devo skrapet ar galloud.

§§§§§§§§

An Emsav a zo kendalc'h istor Breizh ne c'hell ket bezañ dieub a-grenn e-keñver an istor-se. Chom a ra feal dezhañ en ur gemer uhelskouer ur gevredigezh emren - hep rezid n'eus ket a grouidigezh - dindan gwarez ar Stad hogen hep emell eus he beli, pezh a c'houlaka un digreizennadur eus ar galloud ken armerzhel ken politikel e Breizh.

Hogen an Emsav, evit keloù se, ne c'hell ket bezañ brizh-frankizour. Ne c'hell damantiñ da enebourion an diavaez - an estren a fell dezhañ distrujañ Breizh hag ar re a harp anezhañ e Breizh, - na kennebeut all da enebourion an diabarzh a venn arverañ ar galloud ken politikel ken armerzhel evit goveliañ Breizh diouzh o zid.

§§§§§§§§

Amañ e tistroimp da gudenn an darempredoù etre ar gevredigezh emren hag an armerzh e unan. Meneget hon eus er penn-kentañ an ereoù a zo etre ar frankizouriezh speredel hag ar frankizouriezh armerzhel a zlefe pourchas moziou an hini

gentañ. Ur fazi e vefe krediñ koulskoude ez eo liammet ar frankizouriezh - a ro tu da bep den da embreger e rezid-ouzh tonkadur ar gevalaouriezh etrevroadel. Galloud hemañ a zo a vent kevandirel hag a-se a natur impalaerel. En Alamagn, da skouer, ez eo reolet ar Wask gant ar C'hevala a vent europat hag impalaerel eta ; ar c'hevala-se ha na heuilh nemet savelenn ar c'horvo n'en deus atebegzh speredel ebet; penn-giriøk eo, da skouer, da wall-c'hiz an eroterezh hag ar revelouriezh (a zo sellet gant milionoù an dud amplegaouet gant ar Wask-se end-eeun evel ur frankizadur, pezh a zo amoet). Pa dizh ur galloud zo un derez zo avat e voug pep intrudu ha pep krouusted an hinienn en diaz. Ne c'hell ar rezid bleuniañ eta nemet en ur reizhiad a gorrgevalaouriezh dishual a vanfe e par kumuniezhoù a vent gant galloudezh oberiañ an hinienn.

§§§§§§§§§§

Hogen kerkoulz all e vefe faziet neb a gredfe ez eo ar sokialouriezh ereet ouzh ur bloc'h impalaerelour bennak a-du muioc'h gant ar rezid. Seurt sokialouriezh ne ra, betek henn, nemet kemm dalc'herion ar galloud armerzhel hep kemm natur hemañ nemet ouzh e lakaat e servij ur bedveizadur a zo estren ouzh hini an Emsav.

Ar pezh a zo e kont eta en diwezh a zo ar sevenadur modern e unan, an ijinerezhadur koulz hag ur stumm zò a ziorreadur. Nag ar gevalaouriezh etrevroadel, nag ar sokialouriezh etrevroadel ne c'hellont profañ da Vreizhiz ar rezid





hag an dazweredoù dañjerus a-enep dezhañ a c'hellfe sevel e-touez ar boblañs, e vefe tizhet an adempredur da heul ur prantad a liesseurtiezh kevredigezhel a lezfe da aotrouniezh speredel an Emsav kas da benn unded speredel ar vroad ;

- ma fell deomp krouiñ e gwirionez ur sevenadur nevez e Breizh ne c'hellomp ket sellout ouzh ar gevalaouriezh pe ar sokialouriezh impalaerel kemmesket gant ur galloud impalaerel evel diskoulmoù o tereout ouzh ar pal a fell d'an Emsav diraez : perzhiakaat an holl Vrezhoned gwitibunan e krouidigezh ursevenadur diouzh ment ha natur mab-den el ledenez-mañ. Kement-se a zle degas an Emsaverion da zisteurel /an pep daelerezh gant Emsav marksour koulz ha gant an hini kevalaour ; d'ar re-se eo en em dermeniñ en e geñver ha n'eo ket d'an Emsav en em dermeniñ en o c'heñver-int.

(Gourzezet eo ar pennad diwar-benn an aotrouniezh speredel betek an niverenn a zeu)

UN NEBEUT  
TITOUROU  
DIWAR-BENN  
ARMERZH  
BREIZH

Tennet eo ar rihvoù da heul eus an "Tableaux de l'économie française, édition 1968. Quatrième partie : la France par régions et départements", deuet er-maez e 1969. Anat eo en deus ranket aozer ar pennad kenstrollañ sifroù

zo o vezañ n'emañ ket rannvro an Naoned e rannbarzh-steuñv "Bretagne" ar mererezh gall. Ar pezh a c'hell al lenner evezhiañ eo penaos rez-bevañ ar Vrezhoned hag eñ izeloc'h eget hini an darn-vuiañ eus annezourion ar Stad c'hall ha dreist-holl hini annezourion Paris

a zo uheloc'h evelato eget hini ar broioù isdiorreet en Afrika  
pe ar c'hevandirioù all, un tamm mat zoken, hag uheloc'h ivez  
eget hini rannbarzhioù isdiorreet zo a Europa.

GORREAD HA POBLAÑS E 1962

Departamant	Pastell-vro	Korn-bro	Kumun	orread	KM <sup>2</sup>	Poblañs hollet e mil annez	Tudegezh
22	4	48	385	6 877,61	501,9	73	
29	4	43	288	6 785,02	749,6	110	
35	4	43	362	6 757,82	614,3	91	
44	4	46	224	6 893,27	803,4	117	
56	3	38	263	6 763,48	530,8	78	
<hr/>							
BREIZH	19	218	1 522	34 077,20	3 200	94 ann./KM <sup>2</sup>	

Niveradegoù ar boblañs e 1962 ha 1968

Departamant	Poblañs		Kemmadur	Kresk naturel	feur en- pe zivroañ
	1962	1968			
22	501923	506102	+0,8%	+ 2,3%	- 1,6%
29	749558	768929	+2,6%	+ 2%	-0,5%
35	614268	652722	6,3%	4,9%	+1,4%
44	803372	861452	+7,2%	5,4%	1,8%
56	530833	540474	+1,8%	+3,6%	-1,8%
<hr/>					
BREIZH :	3 199 954	3 329 679		+ 4%	

POBLAÑS AR C'HERIOU PENNAÑ (ouzhpenn 50 000 ann.)

Naoned	Poblañs		Kemmadur	Kresk naturel	enbroadur
	1962	1968			
Naoned	240048	259208	+8%	+6,39%	+1,7%
Kêr	349299	393731	+12,7%	+6,7%	+6%
Tachad kêrel					
Roazhon					
kêr	151948	180949	+19,1%	+8,9%	10,5%
Tachad kêrel	161362	192782	+19,5%	+8,9%	+11%

	Poblañs		Kemmadur	Kresk naturel	Enbroadur
	1962	1968			
Brest					
Kêr	136104	154023	+13,2%	+8,2%	+5,1%
Tachad kêrel	150080	169279	+12,8%	+7,8%	5,1%
AN Oriant, Kêr	60566	66444	+9,7%	+6,9%	+2,7%
Tachad kêrel	88618	98655	+11,3%	+6,6%	+4,6%
Sant-Brieg					
Kêr	43142	50281	+16,5%	+6,89%	+9,3%
Tachad kêrel	57371	67121	+17%	+6,8%	+9,7%
Kemper					
Kêr	45989	52496	+14,1%	+6,3%	+7,7%

Poblañs Vreizh d'ar 01/01/66

Departamant	Poblañs d'ar 01/01/66 (dre vil an.)	Dimeziou	Ganedigezhioù	Marvoù	Ouzhpennad ar ganed- igezhioù
22	499,7	3.657	8.326	6.508	+1818
29	755,5	5.117	12.772	9.150	+3.622
35	629,8	4.832	12.082	6.907	+5.175
44	840,1	5.743	16.246	8.732	+7.514
56	533,5	3.800	9.726	6.441	+3.285
BREIZH	3.258,6	23.149	59.152	37.738	+21.414

Emdroadur naturel ar boblañs e 1966 (Feurioù evit 1.000 annezad)

Departamant	Feur-dimeziñ	Feur-genel	Feur-mervel	Kresk naturel	Feur-mervel ar c'hrouadurioù (-1 bloaz)
22	14,7	16,7	13	+3,7	22,7
29	13,5	16,9	12,1	+4,8	21,6
35	15,3	19,1	10,9	+8,2	23,6
44	13,6	19,2	10,3	+8,9	19,2
56	14,12	18,2	10,6	+6,1	23,1
BREIZH	14,2	18,1	11,5	+6,6	23,1
FRANS	13,8	17,4	10,6	+6,9	---

Koskor ar yec'hed e Breizh (dibenn 1966 evit ar 4 bann kentañ; dibenn 1965 evit ar pempvet)

Departamant	Niver ar vezeion	Niver an dantvezeion	Niver an apotikerion	Niver ar glañv-diourion hag ar c'hlañvdiourezed	Niver ar gweleoù er c'hlañvdioù
22	377	128	139	874	3.563
29	674	261	228	987	6.138
35	629	206	203	1.270	6.172
44	872	300	281	2.630	7.237
56	405	139	148	1.378	4.435
<b>BREIZH</b>	<b>2.957</b>	<b>1.034</b>	<b>999</b>	<b>7.139</b>	<b>27.545</b>

Skingomz, skinwel, pellgomz (1966)

Departamant	Skingomzerezh	skinwelerezh	koumanantoù d'ar pellgomz
22	80 400	58 300	30 400
29	109 200	97 400	56 400
35	103 200	77 900	53 500
44	143 300	106 800	76 600
56	81 700	53 700	33 100
<b>BREIZH</b>	<b>517 800</b>	<b>394 100</b>	<b>250 000</b>

Niver ar c'hopriddi - Goprou bloaziek keitat (1966)

Departamant	Niver ar c'hopriddi	Feur stabilded	Gopr Bloaziek Keitat Rik Hollek Gwazed merc'hed		
22	55 000	67%	9.184F	9.985F	6.452F
29	92 100	69%	9.301F	10.265F	6.600F
35	101.500	70%	9.533F	10.446F	6.954F
44	168 900	73%	10.200F	11.294F	7.125F
56	59 100	65%	8.843F	9.517F	6.255F
<b>BREIZH</b>	<b>476 600</b>	<b>69%</b>	<b>9.418F</b>	<b>10.543F</b>	<b>6.777F</b>

FRANS		70%	11.344F	12.600F	8.079F
Pastell-vro PARIS		67%	14.942F	17.114F	10.643F

Tailhou ha telloù paeet gant Breizhiz e 1966

(e miliadoù a lurioù gall)

Departamant	Tailhou war an dud (IRPP)	Tailhou war ar c'hevredigezhioù (IS)	Telloù deskadurezh	Paeamantoù	Telloù all	Hollad
22	90.098	11.257	698	21.673	358	124.084
29	163.191	26.485	1.163	46.385	787	238.011
35	168.681	32.050	1.143	51.781	741	254.396
44	230.080	58.462	1.478	94.766	1.232	386.018
56	94.923	13.059	691	26.342	482	135.497
<b>BREIZH</b>	<b>746.973</b>	<b>141.313</b>	<b>5.173</b>	<b>240.947</b>	<b>3.600</b>	<b>1.138.006</b>

Enkefiadurioù hollel ar Riez c'hall e Breizh e 1966 (e miliadoù a lurioù gall)

Departamant	Tailhou eeun	Telloù marilhadur (endalc'het)	Gwiriou timbr	Telloù war riñv ar gwerzhioù	Hollad
22	142.506	21.232	11.667	59.543	293.555
29	250.294	28.982	18.587	141.744	765.509
35	250.852	33.422	17.156	172.846	797.489
44	373.679	43.384	23.062	337.253	1.353.300
56	130.346	18.697	11.666	66.890	275.436
<b>BREIZH</b>	<b>1.147.677</b>	<b>145.717</b>	<b>82.238</b>	<b>778.276</b>	<b>3.485.289</b>

Espem Breizhiz e 1966 (e milionoù a lurioù gall)

Departamant	Arc'hant postet	Arc'hant tennet	Peadra Breizhiz C.N.E.	Kefioù-espem all	Hollad Niver a levr espem
22	186	143	223	225	448
29	312	241	200	617	817
35	288	224	252	396	648
44	438	349	273	655	928
56	247	194	126	454	580
<b>BREIZH</b>	<b>1.471</b>	<b>1.151</b>	<b>1.074</b>	<b>2.347</b>	<b>3.421</b>
					<b>1.691.000</b>

ELFENNOU AR BARR-BEVAN E 1966 Niver a annezidi evit :

Departamant	1 mezeg	1 apotiker	1 dantvezeg	1 c'harr nevez prenet er bloaz	1 skingomzer
22	1.322	3.585	3.904	44	16
29	1.121	3.315	2.895	41	13
35	1.007	3.120	3.057	40	12
44	973	3.018	2.827	46	11
56	1.318	3.605	3.838	48	16
<hr/>					
FRANS	846	3.277	2.671	41	8
RANNBARZH PARIS	551	3.994	1.722	31	4

	1 skinwelerez	1 plas er fiñvskeudenndi	1 studier er Skol-veur	1 gwele ospital	10.000 KWH tredan bevezet er bloaz
22	9	28	184	141	28
29	8	18	136	123	26
35	8	23	155	101	31
44	8	16	180	114	29
56	10	27	237	121	34
<hr/>					
FRANS	7	19	148	115	22
RANNBARZH Paris	5	22	126	122	16

AN TISAVEREZH E BREIZH E 1966

	HLM da vezañ feurmet	HLM da vezañ prenet	Tiez-anez skoazellet	Tiez-anez all	Hollad
22	1.180	343	1.717	1.169	4.409
29	1.977	742	4.078	1.534	8.331
35	1.252	268	2.646	783	4.949
44	791	677	4.156	2.510	8.134
56	1.798	732	3.141	1.565	7.236
<hr/>					
BREIZH	6.998	2.762	15.738	7.561	33.059

HED AN HENTOU (e kilometradoù)

	Hentoù riez (1966)	Hentoù (1961) departamantel	Hentoù(1962) kumunel	Hentoù(1962) maeziat	Hollad
22	1.048	3.567	8.990	4.880	18.505
29	863	2.432	7.967	7.640	18.902
35	1.166	3.913	5.498	4.500	15.077
44	992	3.591	5.926	18.100	28.609
56	1.049	3.019	5.700	5.200	14.968
<b>BREIZH</b>	<b>5.118</b>	<b>16.542</b>	<b>34.081</b>	<b>40.230</b>	<b>96.061</b>

MARILHADUR KIRRI NEVEZ E 1966

	Kirri-tan prevez pe genwerzhel	Kirri-boutin	Kirri- samm	Stlejerezed kirri-samm	Stlejerezed gounezel
22	11.275	5	1.421	24	2.390
29	18.495	41	2.112	39	2.385
35	15.736	24	1.610	58	2.142
44	18.251	62	2.338	118	1.523
56	11.218	25	1.397	48	1.666
<b>BREIZH</b>	<b>74.975</b>	<b>157</b>	<b>8.878</b>	<b>287</b>	<b>10.106</b>

Hollad ar c'hirri a vicher e Breizh d'an 01/01/67

	Kirri-boutin	Kirri-samm	Stlejerezed kirri-samm	Stlejerezed gounezel	Hollad
22	300	22.161	219	22.210	44.890
29	827	32.439	430	26.791	60.487
35	595	27.628	710	22.689	51.622
44	1.046	35.477	1.149	14.174	51.846
56	660	21.297	401	15.038	37.396
<b>BREIZH</b>	<b>3.428</b>	<b>13.900</b>	<b>2.909</b>	<b>100.902</b>	<b>246.241</b>

Gwallzarvoudoù ar c'hehenterezh e Breizh e 1966

	Niver ar gwallzarvoudoù	Lazhidi	Gloazidi
22	1.441	154	2.023
29	2.089	232	2.787
35	2.216	185	3.078
44	4.246	244	5.475

56 1.534 184 2.179

BREIZH 11.526 999 15.542

BEVEZADUR AN TREDAN UHELSTEGNET E 1966 (e miliadoù a gKWeur)

	Houarnhentoù	Mengleuzioù	Metallouriezh ha greanterezh all	Hollad
22	348	7.383	103.712	111.443
29	2.864	8.951	268.615	280.430
35	11.505	9.467	258.916	279.888
44	3.041	20.464	739.438	762.943
56	445	7.220	156.904	164.569

BEVEZADUR AN TREDAN IZELSTEGNET E 1966 (e miliadoù a dKWeur)

	Prevezidi ha gounezerezh	Bevezadur micherel	Goulaouadur foran	Gwazadurioù foran	Bevezadur an EDF	Hollad	Koumananterior
22	127.372	38.218	4.749	5.336	777	176.452	223.882
29	202.631	66.778	10.261	7.479	1.436	288.585	311.435
35	124.239	64.173	8.658	5.291	1.677	204.038	272.087
44	201.338	73.907	14.619	6.676	911	297.451	325.141
56	102.624	41.818	6.784	3.346	814	155.386	214.421

BREIZH 758.204 284.894 45.071 28.128 5.615 121.912 1.346.966

NIVER A LOENED MAGET d'an 01/10/66 (e miliadoù)

	Kezeg	Oc'hen	Deñved	Givri	Moc'h
22	30	504,1	27,6	1,7	701,8
29	45	542	11	0,5	700
35	21,6	546	12,7	1,6	408,2
44	36,4	427,5	34,9	1,8	156,4
56	33,3	458	16,7	0,8	379

KENDERC'H EDEIER 1966 // - A s k o r a d : k a n t o l / H e k t a r  
K e n d e r c ' h : m i l i a d o ù k a n t o l

Kendalc'h war ar bajenn da heul



	GWINIZH		GWINIZH TENER ENDALC'HET		SEGAL	
	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h
22	28,9	1.337,6	28,9	1.329	21	31,5
29	27	540	27	540	25	12,5
35	26	2.114	26	2.106	20	10
44	24	1.117,9	23	1.117,7	22	21,4
56	21	1.155	21	1.155	16	12
BREIZH		6.264,5		6.247,7		147,4

	KERC'H		HEIZ		MAIZ	
	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h
22	23	1.013,3	25,6	1.852,8	60	60
29	25	750	28	1.960	60	90
35	25	650,2	26	1.170,4	60	120
44	23	214,2	21,8	510,2	38	79,8
56	22	726	22,5	1.040,6	60	30
BREIZH		3.353,7		6.534		379,8

GWINIEGI 1966

	Gorread(e 1000ha)	askorad(hektolitrad/hektar)	Kementad gwin
22	.....	30	600 hl
44	26,6	34,5	917.500 hl

KENDERC'H PIZENNEGED 1966. Askorad : kantol / hektar - Kenderc'h : dre 1.000 kantol

	AVALOU-DOUAR		IRVIN(boued-chatal)		KAOL(boued-chatal)	
	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h	askorad	kenderc'h
22	238	5.463	600	18.000	600	12.000
29	217	6.721	550	16.500	650	4.550
35	228	3.420	600	15.600	650	16.250
44	228	3.420	580	12.994	540	14.786
56	217	6.519	600	17.400	550	14.850
BREIZH		23.486		80.494		62.436

GERIOU DIAES. P.161.KEVREADELEZH/reizhiad a unan stolloù diforc'h war ur bazenn a ingalded.P.162.DIEMPRADUR/ADEMPRADUR. Dent a ra ar gerioù-mañ eus ar verb EMPRAÑ a davez KLENKAN A-GEVRETT. TREGEMM/treuzfurmañ penn-da-benn.STUZ/doare-santout.P.163.HELOC'H/o fiñval bepred.P.164 HOLLVELIEK/a astenn e veli war bep tra.P.165/MAEZEK/bihanoc'h e niver

evit añ deñved ga givri),

KENDERC'H LAEZH 1966 (kenderc'h dre hl ; hollad dre vmilion hl, evit ar saout, dre hl

	Laezh buoc'h		laezh dañvadez		laezh gavr	
	kenderc'h bloaziek keitat dre vuoc'h	hollad	kenderc'h bloaziek keitat dre zañvadez	hollad	kenderc'h bloaziek keitat dre c'havr	hollad
22	24,5	6.571	0,9	13.600	2	2.400
29	22,4	6.267	0,8	4.600	1,1	400
35	26,4	8.530	0,9	6.300	2,5	3.800
44	28,2	5.333	0,7	13.300	3,5	5.100
56	19,1	4.680	0,9	10.800	1,7	1.100
<b>BREIZH</b>		<b>31.381 milion hl</b>		<b>48.600 hl</b>		<b>12.800 hl</b>

DASPARZH AR GORREAD GOUNEZET E 1966 (e mil hektar)

	Gorread aret	Peurvanoù	Gwez-frouezh	Gwiniegi	Glazienegi	Koadeier
22	409,9	103	0,1	...	5,2	31
29	397	95	4,5	...	5,9	35,2
35	406	136	0,6	...	3,9	52,6
44	318,3	187,6	2,3	26,6	13,6	35
56	327	150	2	...	61,8	
<b>BREIZH</b>	<b>1.858,2</b>	<b>671,6</b>	<b>9,5</b>	<b>26,6</b>	<b>34,2</b>	<b>215,6</b>

NIVER AR SKOLIDI E 1965-1966

	KENTAN DEREZ		EIL DEREZ		HOLLAD	
	riezel	prevez	riezel	prevez	riezel	prevez
22	49.137	26.334	24.280	14.082	73.417	40.416
29	64.701	51.495	35.204	29.902	99.905	81.397
35	48.478	50.943	22.600	20.950	71.078	71.893
44	72.112	68.928	30.289	27.954	102.401	96.882
56	37.857	48.145	21.229	17.173	59.086	65.318
<b>BREIZH</b>	<b>272.285</b>	<b>245.845</b>	<b>133.602</b>	<b>110.061</b>	<b>405.887</b>	<b>355.906</b>

GERIOU DIAES (Kendalc'h). P. 165. NUIEK/ Brasoc'h e niver. SAVLEC'HIADURIOU/Doareoù d'en em zerc'hel e-keñver un dra bennak/KORRNIVEREL/bihan tre e niver. BELIGAROUR/a-du gant ar veli. P. 173/PERZHIKAAT/reiñ perzh. P. 176. KEITAT/etre.

DEVEZHIOU-STUDI E.B.V. a vo dalc'het etre an 29/07 hag an 12/08 e-tal Gwened. AR re a garfe dont a c'hell skrivañ da E.B.V., 30 pL. des Lices-35 ROAZHON.

Liesskrivet gant ar gelaouenn N°CPPP 50 015 Ar merour: Y. Ollivier  
Dépot légal : 2ème trimestre 1970

